



# CANTIC AR BUGUEL PRODIG.

*Pehini a zo meurbet profitapl da zisqüez d'an  
dud yaouanc da zioüat diouz ar güin ha  
diouz ar merc'het.*

---

*Var ton ar Falz Pinvidic.*

**E**NTENTIT oll Bretonet, hac e clêfot cana,  
Buez ar Buguel Prodig, mar gallan discleria :  
Plijadur ho pezo sur, mar qirit ententi,  
Ha profitapl eo ive ouz tad ha mam senti.

Cetu amân en antier buez ar mab Prodig,  
A voa en e liberte abaoe youanqic ;  
E dad, e vam en leze da c'hoari ha tripal :  
Diouz goal gompagnuezou e tle pep den dioüal.

Calz a dud zo er bed-mân ha ne sourcoint qet,  
Pe a lec'h e teu madou, pa n'o gonezont qet  
Evit o drouc implija ne reont cás a ze :  
Nep o deus-e gounezet o deus bet poan gante.

Tad ha mam me ho suppli, ha mestr ha mestrezet,  
Corrijit an dud youanq, ha dalc'hit-e sujet ;  
Difennit oute ar güin, ar c'hartou, an dansou :  
Cassit-e d'an Oferen ha d'ar C'hatékismou.

Clêvit oll, tud pinvidic, pa oc'h eus ar voyen,  
Corrijit ho pugale hac ho servicherrien ;  
Na roït qet liberte en yaouanqis dê re :  
Disqit deze oll abret da zervicha Doue.

Grit deze monet bemde da glêvet oferen,  
A bella diouz an den pep seurt goal blaneden,  
Enni ez eus eun tenzor hac e zo caer meurbet,  
Representi Passion hor Zalver beniguet.

Emàn voa eun den yaouanq ha na rê cás ebet  
Pe a iec'h e teu madou, pa n'o goneze qet :  
Qer prompt evel ar grizill pe ar gliz e mis mae  
Vize an arc'hant gantàn, cher vad, c'hoari a rê.

Ur spaç a amzer e voe e ty e dad maguet,  
Madou bras a zispigne ha na rê càz ebet,  
Gant ar c'hartou, an dançou, ar güin hac ar merc'het  
O tispign en un devez tostic da zaou c'hant scoet.

Ne voa nemet pemzec vla pa c'houennas qenta  
E bartach diouz e dad, ma carje e rîi dezâ ;  
Mes e dad a estime, pa vije deut en oad,  
E teuje dezân sqiant pelloc'h da evessât.

E dad hac e vam bemde a bede evitâ  
Jesus hac e Vam Mari da rîi ar c'hraç dezâ

Da veza un den honest , evel ma oant-y bet ;  
Evit qement m'er pedent , oute ne zente qet.

Un devez e lavaras sur d'e vam ha d'e dad ,  
Me renq hirio caout arc'hant evit ober cher vat ;  
Me a zo un den yaouanq eus a gondition ,  
Hac a renq ober cher vad gant an dud a fêçon .

Pa voa pemp bloas varnugent , e lavaras d'e dad :  
Me a ranq caout va fariach bremâ en ur yalc'hat ;  
Me a yêlo da vale evit guelet ar vrô ,  
Ha ma cavân va fortun eun tu , m'e c'hemero .

E dad a respont dezà gant carante bepret :  
Me ro va beunos deoc'h gant carante barfet ;  
Ho pezit sonj a Jesus , ne ancouait qet  
Ar c'homzou en deus ho tad alies lavaret .

Neuze e roas e dad dezàn trègont mil scoet  
En aour fin hac en arc'hant en ur yalc'hat contet ;  
Cetu aze ho partach , pa fell dêc'h hor c'huitât ;  
Dous roï deoc'h e c'hraç d'ober ur veach vat .

Qenta repas a eure ar Prodig obstinet  
Voa en un hostaliri gant ur vanden merc'het ,  
Servichet mat voe certen en deiz-se da goania ,  
Sonerien evit dansal , plac'h coant da servicha .

Pa vise'r gompagnuez ous an daol azeet ,  
E voa e blijadur ha gantân ar merc'het ;  
Qeit ha ma pade arc'hant , cher vat a rent gantân ,  
Plijadur bras a gavent ober goab anezân .

P'oa dispignet e arc'hant , e vije trist meurbet ,  
E lar d'e gompagnuez n'en deus liard ebet ;  
Mes ractal e hostises dezàn e deus respontet :  
M'o tivisco , compagnun , ma na ven-me péet.

Pa voa goastet e arc'hant , ne voa netra chomet ,  
E falle dezàn c'hoari , ober cher vat bepret ;  
Mes a dauliou qeuneuden e voe prest qempennet ,  
Tennet e vleo ouz e benn ha qerqent divisqet.

Goude ma voe chasseet eus an hostaliri ,  
N'en devoa qet a zillad , nac a voed da zébri ;  
Un drue voa e glêvet o crial en henchou ,  
Gant riou ha naon en devoa goude e oll cheriou.

\* Neuze e tistroas c'hoas d'ar guér da dy e dad  
Evit goulen da loja evel eun tremeniat :  
En han' Doue emezàn , m'ho ped hac ho suppli  
Da loja eun tremeniat zo scuis ha na ell mui.

Pa voa lojet gant e dad , n'en anavee qet ,  
En a ouye an doare , mes n'en disquéeze qet ,  
Pa voant èt oll da gousqet , én a gassas gania  
Vesseliou aour hac arc'hant demeus ar re gaera.

Neuze en em gavas prest gant he hostaliri ,  
Hac en devoe evite da eva , da dibri ;  
Qeit ha ma padjont outan bepret e re cher vat ,  
Mes ne badas qet pell bras ar vech-se ar yalc'hat.

Neuze e voe tracasset , injuriet gante ,  
Evel our forban basnet voa da velet neuze ;

Hac o tonet da zònjal e voa ur pec'her bras ,  
Pa voa bolonte Doue en em gconvertissas.

Pa zònjas en e vuez , e sellas ous an eë ,  
O sellet pebes fortun bepret a rancontre ;  
Monet a eure neuze goude e voal vue ,  
Da evessa al loened o tistrêi ous Doue.

Monet a eure neuze d'uñ ty da servicha ,  
Ma vije o bolontez da rëi souten deza.  
Me chomo da labourat en arat , mar qeret ,  
Pe autramant me a yël da viret al loenet.

Neuze e laras dezàn ar merer ac'hane :  
N'anduràn qet an dud scàn a ve bet o vale ;  
Me meus tud da labourat qement hac a so ret ,  
Nemet da viret ar moc'h mar qeret e chomet.

En han'Doue , emezàn , va mestr , me ho suppli ,  
Me raï vel ma lavaret : va mirit en ho ty ;  
Mar gallàn ho servicha evel ma leveret ,  
Qeit ha ma plijo ganêc'h evit caout un tam boet.

Neuze e zeas ar Prodic da vessa ar moc'h-se ,  
O tont da gonsideri güechal en e vue ,  
En devoa grêt cheriou mat , ha drouc distribuet ,  
Ha bremâ en paourente n'en devoa esqen boed.

Un druez voa e glèvet en noas beo o crial ,  
Gant paourente ha fatic goude e reus fall ;  
Gant naon e voe suprenaet qen a rancas dibri  
En ul laouer gant ar moc'h a bep seurt vileni.

Güell ve da un den certen beza nao de var yun  
Eguet ober re gorfat, na beza disasun,  
Coll a ra e zantimant neuze gant re gorfat,  
Ha m'ar caret e lezel, e raï eun drouc benac.

Beza escus debochet ha drouc implij madou,  
Ar merc'het fall bac ar güin zo caus da valeuriou,  
Ha goude ar foll dispign e zeont d'en em gana ;  
Cetu siouas maleuriou goude drouc implija.

Peguen liez a zen sur a zo var ar bed-màn,  
A zo bet pinvidic bras, allas ! zo paour bremàn !  
Goude prodigalite, eva güin ha c'hoai,  
E vezoz trist ar Prodig, ma na ve da zibri.

Goude e foll dispignou, cetu en distroet  
Da veza den graciis, humbl meurbet ha parfet ;  
Pa voa bolonte Doue en em gconvertissas,  
Hac e teuas ar vech-se d'ar guer morc'hedus bras.

Goude-se en em rentas e qichennic e dad ,  
Hac e teuas da sònjal gant ur volonte vat :  
Autrou-Doue , emezàn , ha m'em be hardisson  
Da vonet dirac va zad , ha me qen dirèson.

Me a ya en han' Doue , emezàn , da antren :  
Deiz mat dèc'h , c'houi a bedàn , cetu ho courc'hemen,  
Cetu ho mab hirvoudus : lavaret mad ho poa  
E vizen e paourentezi , ma ne garjen poania.

Va mab , me a zo joaüs d'ho peza distroet ,  
Meulet bremàn a galon ar Verc'hez beniguet ;

Me am boa digant Doue pell a zo deziret,  
Evit clèvet ho toare, pelec'h e vijec'h éti.

Me so ar maleürussa a voe biscoas er bed :  
En hano Jesus ha Mari, va zad, va fardonet :  
Me meus goall distribuet ar pez ho poa roet  
Din da ober va frofit, ma carien o miret.

E dad a laras neuze d'e oll servicherrien :  
Ret eo laza eun oan læz, un oc'h hac un eujen ;  
Da ober ur banquet caer d'am mab zo distroet ;  
Ret eo dont, va zud qeaz, varc'hoas d'e velet.

Calz a dud zo er bed-mâ evel ar Mab Prodig,  
Hac a zo anval ive ouz ar Falz Pinvidic ;  
Er bed-màn eo e qevont amâ o baradoes,  
N'o deveus sônj a Jesus nac e Yam ar Verc'hez.

Me ho suppli, tud yaouanq a bep sort qalite,  
Tud a bep condition, hac ar re gðz ive,  
Diouz goall gompagninez da zioüal bepret  
Ar c'hoari, an nðzveziou, ar güin hac ar merc'het.

Ar re-ze siouas, a zo da galz occasion  
Da ober calz maleuriou hac o daonation :  
Caledet int nðz ha deiz ebars en o fec'het,  
Fé eo gant calz o c'helen en hent da veza salvet.

Ma caremp consideri en Mari-Madalen,  
Zo en em gconvertisset gant ur sermon hepken,  
Ni ne reomp cås, siouas, evit clèvet bemdo  
Sermoniou, buez ar Sent, hac exemplou ive.

Allas ! nac a oferen bret, na sermoniou ive,  
Ne gar qet tud obstinet n'o deus doujanç Doue,  
Na Catekismou da Sul, ive d'ar Goueliou din,  
Cetu, siouas, an henchou a gundu d'ar goal fin.

Diou gonsideration a rencomp da gavet  
Evit miret ouz an den ne ve qet condaonet :  
Ar c'henta caret Doue dreist madou ar bed mân ;  
D'an eil, aon rac an ifern, a zo carguet a boan,

En han' Doue, Christenien, greomp oll orêson  
D'ar Verc'hez sacr, Mam Jésus, hemdez a vir galon,  
D'hon Æl-mat ha Gardien, d'ar Zent ha d'hor Paëron,  
Zo hon güir Advocadet dirac Roue an Trôñ.

Clévet oc'h eus an histoar, ha mar qeret miret  
Dious prodigalite dont da dioüal bepret ;  
Gouleñnomp digant Jesus hac ar Verc'hez divin  
Ar c'hraç da vont d'e veuli er Barados er fin.

FIN.

---

E Montroulez, e ti LÉDAN, ru pont-an-Itron-Varia.